

CHANSON MARI-LOUIS

VAR DON : FANTIC COANT

Me ho ped Bretonnet, da laquat ho speret
Da glevet eur Chanson a neve compostet,
Zo gret da zaou zen yaouanc, var don Fantic Coant,
A so eun ton charmant evit an dud yaouanc.

Cavet meus eur sujet da ober eur chanson,
Gret da zaou zen yaouanc n'eur garie a galon
Composé d'ar garante certen e oa entrese :
Constant e voan da verval an eil evit eguielle.

An daou zen-ma a ro d'an oll tud da velet
Ar garante barfet a dleon da gavel,
Evel ma no ordrenet gant an autrou Doue,
M'ar bo oll garante an eil evit eguielle.

Ne gredan quet e ve sur cavet er bed man
Eur plac'h hag a rafe evel e deus gret houman,
A gitafe e moyen, c'herent hag e c'hanter,
Evit mont d'ar bresel da heuill e guir mignon.

Hi a vo ar rouanes eus ar merc'het yaouanc,
A gomser anhesi en pevar c'horn ar Franç :
Non nemet eur baysantes, a so casset d'ar pales ;
Zo presantet d'ar Roue ive d'ar Rouanes.

Hi so fourdilisen ann oll merc'het yaouanc,
Coulz en e honestis vel en e c'homportamant :
Zo bet eis vloas er brezel e servich ar Roue,
Guisquet vel eur soudard, den ne anaveye.

Hag ouspen an dra se, e vije o repos,
Gant e brassa mignon hi a gousque bep nos,
Epad eis bloas antier eo bet gantan en arme,
Ha bep nos e gousque gantan eus e geste.

Hag a botret yaouanc a so bet glac'haret,
E fiont er merc'hel so n'em gavel tromplet !
Pa sonjent bea caret, e vijent abandonnet,
E chome glac'haret hag ive chagrinet.

Houma ne deus quet gret vel a ra ar seurt se :
Hi e oeus d'alc'het mad certen d'he c'harante,
Da Yannic, e amorous, a gare e guir galon,
Contant oa da verval evit e guir mignon.

Guelomp eta Mari, guelomp an occasion
A vo bei cos dec'h-ho da guittat ho canton
N'oaa nemet ar garante ho pao evit ho mignon,
Hac a voa sur gravet ebars creis ho calon.

Pa vije an daou zen-ma d'ar zul en ho farres,
N'eur gavent assemblez da barlant alies ;
Eur garante ar vrassa a oa certen etrese ;
Vel ma clefot er fin, oa bras o amitie.

Eun desir vrais ho doa, ma bermetje Doue
E vijent unisset an eil gant eguielle ;
Urs ar Roue empêche, ne fote nemet eis de
Pa deus an ordrenanç da servich ar Roue
D'ar zul en oferen bret e rannas e c'halon.
Pa gleo an ordrenanç a lenne ar Person ;
Ha c'hui gleo, emezan, cetu ama an ordrenanç
E ranque a soudardet evit ar Roue Franç
Ha permetet e ve eme au den yaouanc,
E ve ret din quittat eur vignones ker coant !
Eur vignones a garant gant kement a garante,
Hag a rancan quittat evit mont d'an arme !

E sorti ar vered e rancontras e blac'h,
E galon chagrinet ha goal glac'haret bras,
Petra c'heus-te, emesi, me vel out chagrinet,
Allas ! va mignones, o quittat a vo ret !...
Lennet e an ordrenanç evit a zoudardet ;
Me garfe birviquen n'am bije o quellet
Allon va mignon ker, eme ar plac'h neuze.
Neus quet a zize nor e servich ar Roue,
Mar bes soudard vaillain ha non pas eur poltron,
Te vo recompancez gant ar Roue Bourbon.

Contant e ven Mari, da vont sur d'ar brezel
Penevert ma e ret, va douç, o tilezel ;
Ia me a ve contant da varvel en arme
Ma c'halfen soupçonné verc'h infidel din-me.

Me a vel va mignon, benos sur em c'hares,
Ne golli quet da boan ; me a vo da vestres
Ne vanc quet da scrifa din pa vi en da regimant,
Ha te velo neuse querquent va santimant.

Dalit Mari-Louis, cetu eud diamant,
A zo en aour melet, a roan dec'h en presant,
Zo test d'ar garante e mus, va douç, evidoc'h ;
Birviquen va mestres, ne garin nemedoc'h.

Partiat'ra neuse da vont d'e regimant.
Vardro daou vis goude e scrif d'e vestres coant
Me a zo em regimant contant vel eur Roue ;
Mes ho quelet, va douç, a garfen, va Doue.

Querquent vel ma clevas e voa er regimant,
Hac hi monet d'he fres da guemeret arc'hant ;
Quemer a ra tri c'chant scoet, mont a ra da Bors Louis,
Goude bea guisquet habillamant bourc'his,
Querquent e man en hent evit mont da Naonet,
E lec'h ma voa Yannic, e mignon angaget.
Pa voe ta eruet er gaér an Naonet
Comiz eus ar c'habiten ractal e deus c'hoantet,
Bonjour, Autrou, amezi, a c'houi a aneoje
Eun den a so contant da zervich ar Roue.

Evel me voa guisquet e guis eun den yaouane,
Ractal voe angaget ebars er regimant ;
Ha tri deyes goude voe laquet en faction
Dirac ar c'hordegard ma voa e guir mignon,
Neuse er saludas gant eur guir reveranç,
Evel ma a dleet da eur zoudard a Franc'.
Hac er memes nosves eus e geste e cousscas,
Hep cavet ne soupçon e voa ousman eur plac'h.

Guelit ar garante eus an daou zen yaouanc ;
Epad eis vlas entier m'int bet er regimant,
Biscoas essur na zouetas e voa ouman e vestres,
Hac e vije bennos coussket eus e gestes.

P'oe eru an amser d'a gavet e c'honje,
Hac hi mont da gavet e c'habiten eun de :
Cetu echu va amser, Autrou, roit d'in va c'honje,
Evit ma zint d'ar gaer goude servich ar Roue.
Me a c'houlen ouzoc'h c'hoas sur zoudard yaouanc,
Zo echu e amser ebars o regimant.

Zo va c'hamarad guele a garan a wir galon,
Evit ma imp hon daou assemble d'hor c'chantan
Neuse ta ar c'habiten a zinas daou gonje,
Evit distrei d'o pro goude servich ar Roue,
Evel ma yent gant an hen, hi a goane goal gre :
Allon, ni so tost d'hor bro, va douç va c'harente.

Pa voent eru tost d'ar bourg, quent entren en o c'hær,
Hac hi da lavarat neuse d'e zervicher :
Ne c'heus-te quet er vao-mam, emêni, eur vestres coant,
A behini e comzes pa voas er regimant ?

Allas ! eo-da, emean, n'eur sqi var e galon.
Ne meus sur er vro-mam, ma douc'ic Marion.
Zo caus on gla'haret oll aboe m'on angaget :
Tremenet e an vlas ne mous i puet quelet.

Te a lavar gaou, emei ; sel ervat ouzon me
Me a so Mari-Louis, da zouç, da garante,
A so bet epad eiz vlas eus da heuil en arme,
Ac a so bet homnos coussket eus da goste.

Ha te vel, va mignon, aman an diamant
A poa de roet din guet mont d'ar regimant ?
A voa test d'ar garante a lares poa evidon-me :
Guelet ec'h eus certen maus evidout ive.

Perac eta Mari, pa voa er regimant
E lezes va c'halon en glac'har en tourmant ?
Rac me meus da garet certen dre guir garante,
Mes mui a caran c'hoas sur an Autrou Doue.

Allon ta, va mignon, demp da di ar Person ;
Ha me a ya brema da ganta va réson :
Va c'hetel ze studiet, me an laquai estonet,
Martese biscoas plac'h n'en deus an bet spontet.

Allon, Autrou Person, eme Mari-Louis,
Hastit en em guempen da vonet d'an illis :
Ni so daou zoudard yaouanc o tont eus an arme,
Ha c'houi reng demesi an eil gant enuile.

Ha ! ha ! eme'r Person cetu eur c'hoari sot :
Biscoas n'om boat clevet e ve demeet daou bot,
Nan, nan, eme'r Person, me scrifo d'an Escop
Qent ma vent oblijet da eureuji daou bot.

Dalit Autrou'r Person, cetu daou gonje mat,
Brema me ya d'ar guer evit chench va dillat :
Ni z'on daou eus ar baros, me a so Mari-Louis
Zo ganet er bourg-man, badeet en oc'h Ilis.

Ah ! ia eme'r Person, me voar piou out brema ;
Me rayo da eured, ne gousto di netra ;
Me a scriio d'ar Roue evidout Mari-Louis,
Ha te po an enor da vonet da Baris.

Pa voent bet demeet, e scrifas da Baris,
Ar Roue a c'houlen cass dean Mari-Louis :
Ne nemet eur baysantes, m'es mont a ra d'ar pales
Presantet d'ar Roue couls ha d'ar Rouanes.

Ha pa voe dirazan e presant e c'honje :
Ia, sir emesi, me so bet an arme ;
Gout a ran an exerciç ha mania ar zabren,
Ha laquat da dehel meur a a Iversourien.

Ar Roue mad nese nens hi recompançet,
Vel eur zoudard vaillant en devoa meritet,
Rac se merc'ched yaouanc, redit oll d'an arme,
Hac o po recompanç ive gant ar Roue.

FIN

CHANSON NEVEZ

VAR SUJET

EUR BROMEZE FERVANT HAC EUR SEPARATION ETRE DAOU DEN YAOUANC

Var ton ar Fauz Promese

Prosternet e ma c'halon
N'ho presans, Bretonnet,
Vit goulent o c'hatautant
Eur momet en secret ;
Me disclerio en guirion
Eur promeze fervant
Hac eur separation
Entre daou den yaouanc.

Na fel quet din er poent-man,
Dont d'abusin paper ;
Sujet avoalc'h a gavan
Hep asten ar matier
Eur re bennag martese
A gemero an er
Da meprisan ma bue
Dre ma c'hesplikin scler,

N'on quet dign a drouc-zello
Pa n'am anaveet ket,
Rac zavantoc'h evidon
A so bet n'em leuryet
Ebars en laso Venus
Hac e mab Cupidon
Pere a rent malheureuz,
Sivoas ! meur a galon.

Me a so eun den yaouanc
Ag a meus consanet
Carout eur plac'h yaouanc
Dign da vean caret :
Vit dirag ma daou lagad
Na meus remerquet hini
Da gad eun er ken agreabl
Herve ma fantasi.

Vel gand Doue inspiret,
Da ouel an Assomption,
Me a so bet az et
N'he c'hichen en eur pardon
En parous Pleudaniel,
Kichen eur gos illis
Eur plas devot a santed
Goudre fin an ofis.

Eno var douar ar Verc'hes,
Me meus bet remerquet
He skiant ac e furnes
Ha memes e genet,
Me meus gret reflecson
A n'em sonjet erfat
Na momp biquen separation
Vit mar be ze d'he grat.

Abofter ma yaouankis
A neus ma arretet
Bet a voan vit n'en divis
Ha pa meus quet credet
Parlanti dei enep fesson
Denieus ar garante
A zanten bars em c'halon
N'he c'hever en dese.

Nao mis em bet en guirion
Hep en em rencontri
Delc'het ho c'hatansion
Yaouankis me o supli
Aman a teu Cupidon
Gant eun ardeur neves
Da allumi n'em c'halon
Etemancho a garante.

Annons a ris d'ar plac'h-se,
O vont d'eun assemble
Penos am boa bolante
Da gat e c'hamitie
Hac evit n'em assuri
Deus e fidelite
A meus goulet diganti
Ober din promesse.

AR PLAC'H

« Ma mignon nimp so yaouanc
D'ober promesseou ;
Gant an disterañ tourmant
A chanch hom ideou
Ma torfemp hon promesse
Hac ober eur parjur
Me fell din en em bue
Kavet eur guir assur.

AR POTR

« Birviquen an amser fall
Na allo distruban
Ar garante leal
Pehini a dougan ;
Mes me so en disfians
Demus ho carante :
Roet din ann assurans
Vit a rest hon bue. »

AR PLAC'H

« Arsa eta, ma mignon,
Pa omg en plas hirie
Na vo quet dre draison
A rin dec'h promesse

Kemer a refomp vit test
Eun avocat a Dreguer
Rac on c'halon so c'hoas fresh
Da chom hep culateur.

He dorn en hem hini,
Prosternet d'an daoulin
Dirag Sant Ervoan Etouri,
Mab henan Kervarzin,
En illis ar Minihi,
An naouteuc a vis mae
A prometjomp dimesi
Hon daou ann eil d'eguile.

Secret ve ar promesse
Dirag eur pobl a leiz :
Pere dired an de-de
A bep coste a Vreiz
Da velet penn hom avocat
Dre guir devotion
A douger var eur brancar
Bars er procession.

O solennite joaüs
Evit eur pobl a te ;
Biscoas de quen evurus
N'em boa cat em bue,
Zantout a ran ma c'halon
Vel benet mesq ar joa ;
Mes ret e cat separation
Rac an nos a dosta.

AR POTR

« Arsa plac'h yaouanc fidel,
Poent eo dispartian
An heol so arri izel :
Lequet din breman
Eun termen d'a n'em gavet
Herve ho polante,
Rac pel a omp separat
An eil deus eguile. »

AR PLAC'H

« De eisvet ar Sacramant
Bars en kær Landreguer,
Zo eun assamble charmant
Gant ar bobl ar c'hartier
Mar be se d'ho polante,
Hon daou n'imp ario
En Landreguer, en de se
Goude ar gouspero. »

Dalit Mari-Louis, cetu eud diamant,
A zo en aour melet, a roan dec'h en presant,
Zo test d'ar garante e mus, va douç, evidoc'h ;
Birviquen va mest'es, ne garin nemedoc'h.

Partiat'ra neuse da vont d'e régimant.
Vardro daou vis goude e serif d'e vestres coant
Me a zo em régimant contant vel eur Roue ;
Mes ho quelet, va douç, a garfen, va Doue.

Querquent vel ma clevas e voa er régimant,
Hac hi monet d'he fres da guemeret arc'hant ;
Quemer a ra tri c'chant scoet, mont a ra da Bors Louis,
Goude bea guisquet habillamant bourc'his,
Querquent e man en hent evit mont da Naonet,
E lec'h ma voa Yannic, e mignon angaget.
Pa voe ta eruet er gaér an Naonet
Comz eus ar c'habiten ractal e deus c'hoantet,
Bonjour, Autrou, amezi, a c'houi a aneoife
Eun den a so contant da zervich ar Roue.

Evel me voa guisqet e guis eun den yaouane,
Ractal voe angaget ebars er régimant ;
Ha tri deves goude voe laquet en faction
Dirac ar c'hordegard ma voa e guir mignon,
Neuse er saludas gant eur guir reveranç,
Evel ma a dileet da eur zoudard a Franc'.
Hac er memes nosves eus e geste e coseas,
Hep cavet ne soupçon e voa ousman eur plac'h.

Guelit ar garante eus an daou zen yaouane ;
Epad eis vlas entier m'int bet er régimant,
Biscoas essur na zouetas e voa ouman e vestres,
Hac e vije bennos coussuet eus e gestes.

P'oe eru an amiser d'a gavet e c'honje,
Hac hi mont da gavet e c'habiten eun de :
Cetu echu va amser, Autrou, roit d'in va c'honje,
Evit ma zint d'ar gaer goude servich ar Roue.
Me a c'houlen ouzoch' c'hoas sur zoudard yaouane,
Zo echu e amiser ebars o régimant.

Zo va c'hamarad guele a garan a wir galon,
Evit ma imp hon daou assemblies d'hor c'chantan
Neuse ta ar c'habiten a zinas daou gonje,
Evit distrei d'o pro goude servich ar Roue,
Evel ma yent gant an hen, hi a goane goal gre :
Allon, ni so tost d'hor bro, va douç va c'harente.

Pa voent eru tost d'ar bourg, quent entre en o c'haer,
Hac hi da lavarat neuse d'e zervicher :
Ne c'heus-te quet er vao-mam, eméni, eur vestres coant,
A behini e comzes pa voas er régimant ?

Allas ! eo-da, emean, n'eur ssei var e galon.
Ne meus sur er vro-mam, ma douçic Marion.
Zo caus on gla'haret oll aboe m'on angaget :
Tremenet e an vlas ne mous i puet quelet.

Te a lavar gaou, emei ; sel ervat ouzon me
Me a so Mari-Louis, da zouc, da garante,
A so bet epad eiz vlas eus da heuil en arme,
Ac a so bet bonnos coussuet eus da goste.

Ha te vel, va mignon, aman an diamant
A poa de roet din guet mont d'ar régimant ?
A voa test d'ar garante a lares poa evidon-me :
Guelet ec'h eus certen maus evidout ive.

Perac eta Mari, pa voa er régimant
E lezes va c'halon en glac'har en tourmant ?
Rac me meus da garet certen dre guir garante,
Mes mui a caran c'hoas sur an Autrou Doue.

Allon ta, va mignon, demp da di ar Person ;
Ha me a ya brema da ganta va résion :
Va c'hetel ze studiet, me an laquai estonet,
Martese biscoas plac'h n'en deus an bet spontet.

Allon, Autrou Person, eme Mari-Louis,
Hastit en em guempen da vonet d'an illis :
Ni so daou zoudard yaouane o tont eus an arme,
Ha c'houi reng demesi an eil gant enuile.

Ha ! ha ! eme'r Person cetu eur c'hoari sot :
Biscoas n'om boat clevet e ve demeet daou bot,
Nan, nan, eme'r Person, me scrifo d'an Escop
Qent ma vent oblijet da eureuji daou bot.

Dalit Autrou'r Person, cetu daou gonje mat,
Brema me ya d'ar guer evit chench va dillat :
Ni z'on daou eus ar baros, me a so Mari-Louis
Zo ganet er bourg-man, badeet en oc'h Ilis.

Ah ! ia eme'r Person, me voar piou out brema ;
Me rayo da eured, ne gousto di netra ;
Me a scriio d'ar Roue evidout Mari-Louis,
Ha te po an enor da vonet da Baris.

Pa voent bet demeet, e scrifas da Baris,
Ar Roue a c'houlen cass dean Mari-Louis :
Ne nemet eur baysantes, m'es mont a ra d'ar pales
Presantet d'ar Roue couls ha d'ar Rouanes.

Ha pa voe dirazan e presant e c'honje :
Ia, sir emesi, me so bet an arme ;
Gout a ran an exerciç ha mania ar zabren,
Ha laquat da dehel meur a a Iversourien.

Ar Roue mad nese nens hi recompanet,
Vel eur zoudard vaillant en devoa meritet,
Rac se merc'hed yaouane, redit oll d'an arme,
Hac o po recompanç ive gant ar Roue.

FIN